

# Lid ar GOUSPEROÙ ent prevez

Erbedet eo deraou gant lenn an Navvezh, gant an digoradur en e raok hag an erieul deroù :

## *DIGORADUR*

### **Al lennour**

Amen. Klod dit-Te, hon Doue, klod dit-Te !

Tiern an neñv, Dihuzour, Awen ar Wirionez, Te a vez beplec'h hag o leuniañ pep tra, teñzor ar re vat ha Roour Buhez, deus hag annez ennomp, glana-ni eus pep namm ha salv hon eneoù, Te a zo daioni.

Santel Doue, Santel kadarn, Santel diankou, bez trugarez ouzhimp ! (*teir gwech*)

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen C'hlan ; bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Trinded holl santel, bez trugarez ouzhimp ! Arloz, distaol hon fec'hedoù ! Aotrou, diskarez hon gwalloù ! Sant, bez d'hon aeneziñ ha yac'ha d'hon nammoù, dre berzh da Anv !

Kyrie eleison ! Kyrie eleison ! Kyrie eleison !

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen C'hlan ; bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Hon Tad a zo en neñvoù, hael ouzhit bezet graet, deuet dimp da Rouantelezh, bezet da vennantez ken en neñv ken er bed. Bara

an arc'hoazh ro-eñ dimp feteiz, distaol dimp hon dleoù pand omp o tisteurel da neb zo dleour dimp. Ha n'hon lez ket da vont tre en arnod, hogen sav diwarnomp an aerovant.

Amen. Kyrie eleison ! (*12 gwech*)

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen C'hlan ; bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Deuit, azeulomp ha stouomp dirak Doue hon Roue !

Deuit, azeulomp ha stouomp dirak Krist, hon Roue hag hon Doue !

Deuit, azeulomp ha stouomp dirazañ, Krist, hon Roue hag hon Doue ! (*en ur stouiñ 3 gwech*)

Dre bedennoù hon zadoù santel, Arloz Yezu Krist, Doue, bez trugarez ouzhimp !

« Amen. Deuit, azeulomp ha stouomp dirak Doue hon Roue !

Deuit, azeulomp ha stouomp dirak Krist, hon Roue hag hon Doue !

Deuit, azeulomp ha stouomp dirazañ, Krist, hon Roue hag hon Doue ! »

*en ur ouzhpennañ ur pevare gwerzad* : « Deuit, azeulomp ha stouomp dirazañ. »

**Salm kosmek (103)<sup>1</sup> :**

Ma, ene, bennig an Aotrou ! + Aotrou, ma Doue, meurbet out bras, \* gant bri ha kened ez out gwisket,

---

<sup>1</sup> Sl. erverkadoù, p.

Gronnet gant gouloù evel kougoul, \* o tispakañ an oabl evel ballin.

En doureier o frammañ laez E annez, + gant ar c'houmoul oc'h ober E garbed, \* hag o kantren war eskell ar gwent.

Gant E Aelez e ra avelioù, \* gant E wizion flammoù tan.

Sonnañ an tir war e solioù a eure : \* ma vo didrantell da viken.

Gant ar mor evel pourc'had e voe ganit goloet ; \* ouzh ar menezioù e sachas an doureier.

Rak da damall, int ha dichalañ, \* ha strinkañ ouzh da gurun.

Menezioù zo gorroet, saonnenoù zo gouzizet, \* tre el lec'h dit deverket,

Ur vevenn 'c'h eus desezet d'an doureier na dreuziñ, \* ma n'adtrofont da liñvañ an douar,

Ar stivelloù en o c'hasez da froudoù, \* dre ar runioù e tinaouont,

Diediñ loened ar maezioù holl a reont, \* ar gouezezen a zivalbont.

War o glannoù e neizh evned an oabl, \* ha geizañ dre o glasvez.

A laez E annez, gwazhiañ ar runioù a ra, war e walc'h e vez an douar gant frouezh da labourioù.

Diwan geot a laka evit ar bioù, \* gwinizh e gounid mab-den,

Da genderc'h bevañs eus an douar, \* gwin da zrevaat kalon mab-den,

Olev da weleviñ e vin, \* ha bara da reiñ nerzh da greiz mab-den.

Fonnus e vez gwez an Arloz +, \* kedar Lebanon kresket gantañ.

Eno e vez an evned o neizhiañ, \* d'ar c'hwibon ez eo ar gwez kroaz e annez.

Ar menezioù war o c'hern emañ ar bouc'hed ; \* er reier e ra o c'huzh ar gedon.

Al loar a eure da amzeriata ; \* an heol a oar diouzh e guzh.

An teñval a strewez hag e vez noz : \* neuze e tiskrap loened ar c'hoadoù.

Ar gouezviled a yud war o freizh, \* o c'houlenn digant Doue o boued.

Savet an heol, en em glenkont, \* davet o faou da souchañ.

D'e zevezh ez a mab-den, \* ha gounit tre d'an noz.

Lies eo da oberoù, Arloz, + razh gant furnez ' c'h eus int graet ; \* barr eo an douar eus da grouadurioù.

Hennezh bras hag ec'hon eo ar mor, \* ma ner diniver al loened etre bras ha bihan.

Warnañ e verde al listri, \* hag ar morvil oberiet ganit da c'hoari ennañ.

An holl anezho ouzhit a c'hortoz, \* ma roi boued dezho en o fred,

Roet dezho ganit, int ha pakañ ; \* digoret da zorn, ervat int bonaezhet,

Kuzhet dit da ouezvoud, int ha mantrañ ; + lamet o anal ganit, int ha migañ, \* ha distreiñ en o ludu.

Daveet da Awen, krouet e vezer, \* ha nevezet ganit gorre ar bed.

Klod d'an Arloz dalbezh ! \* levenezet an Arloz en E oberoù,

A sell ouzh an tir hag e kren, \* stekiñ ouzh ar menezioù hag e vogedont.

Me da ganañ, d'an Arloz tra ma vevin, \* seniñ da 'm Doue keit ma vezin.

Bezet c'hwec ma diskan outañ, \* pand eo ma levenez en Arloz.

Ra ziwezho ar bec'herion diwar an tir, + ha 'r re hakr na vefont ket ken. \* Ma ene, bennig an Arloz.

An heol a oar diouzh e guzh \* an teñval a strewez hag e vez noz.

Lies eo da oberoù, Arloz, \* razh gant furnez ' c'h eus int graet.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen C'hlan, \* bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Allelouia ! Allelouia ! Allelouia ! Doue, Klod dit-Te ! (*teir gwech*)

Arloz, hon goubeizh, Klod dit-Te !

*Amañ e teraouer gant Salmoù ar Gouloù, diouzh ar gleur kende gouezhat. Levrenn ar c'hanoù zo ennañ ar gleur 1, a zo hini an heñveleion kinniget amañ.*

## Salm 140

### Ar c'hor

Arloz, ouzhit e c'harman: difrae davedon-me ; \* selaou ouzh ma mouezh pa c'halvan warnout.

Diogelet ma fedennoù dirazout evel pervoged, \* hag ar gorren eus ma daouarn evel oferenn an enderv.

### Al lennour

Stailh, Arloz, ur prenn war ma genou, \* diwall ouzh dleizenn ma divweuz.

Na stummet ket ma c'hreiz gant ar walloni, \* o klask digarez da 'm fec'hedoù.

Ar wallobererion ne zebrin ket o lipouzeri ; \* ar c'hevion da 'm c'hareziñ a ve din trugarez, \* ha da 'm c'hastizañ.

Na fennet eoul ar pec'her war ma fenn, \* rak enep d'o drougoni emañ ma fedenn.

Rampet o barnerion ouzh ar Roc'h, \* e klevfont ez eo c'hwek ma c'homzoù.

Evel ur voudenn skreunet war an douar, \* ez eo foeltret o eskern en ankou.

Ouzhit, Arloz, e sav ma lagad, + ennout emañ ma goubeizh; \* na lak ket dispak ma ene.

Ma diwall diouzh o antell stignet dirazon, \* diouzh griped ar wallobererion.

Ar bec'herion da gouezho kevret en o roued, \* pa vezan ma-unan e savete.

### Salm 141

Ma mouezh a vez ouzh an Arloz o c'harmat ; \* ma mouezh ouzh an Arloz o truekaat.

Ma fedenn a fennan en e arbenn, \* ma c'hlemmvan dezhañ a zezrevellan.

Pa 'z orwan ennon ma spered, \* Te avat, a oar pelec'h on erru.

War an hent ma 'z an gantañ, \* ez eus kuzhet din un antell.

Sell a-zehou a ran ha merzhout : \* ne zamanter ket din.

N'eus ket a dec'h evidon, \* ne vezer ket poan ganin.

Ouzh an Arloz e c'harman : \* « Ma goubeizh out », emezon, « ma ferzh e Tir ar Re Vev ».

Ro steud da 'm c'hlemmvan, \* blin ma 'z on ken ez on ;

Ma diwall diouzh ma handeerion, \* a zo kreñvoc'h egedon.

*Hervez an niver a engwerzadoù kanet ez embanno al lennour ar gwerzadoù hag e kano ar c'hor an engwerzadoù.*

*Evit 10 engwerzad :*

10. Digaël diwar ma ene, \* ma kanin meulvan da Anv.

9. En-dro din e vez ar re gevion, \* ken na 'm digolli.

*Evit 8 engwerzad :*

**Salm 129**

8. Eus an traoñ e c'halvan warnout, \* Arloz, selaou ouzh ma mouezh.

7. Arloz, ro steud da selaou \* ouzh mouezh ma galvadenn.

*Evit 6 engwerzad :*

6. Mar kounfes pizh eus an nammoù, Arloz, \* piv a c'hellfe herzel ? Ouzhit avat emañ an diskarez : \* ma vo azaouez dit.

5. Gortoz a ran digant an Arloz, digant da Gomz e c'hortoz ma ene, goubeizh a ra ma ene ouzh an Arloz.

*Evit 4 engwerzad :*

4. Adal ged ar beure bet an noz, adal ar beure e c'houbeizh Israel ouzh an Arloz.

3. Rak ouzh an Arloz emañ an drugarez, gantañ emañ puilh an daspren. Rak Eñ a zaspren Israel eus e holl nammoù.

**Salm 116**

2. Meulit an Arloz, kenelioù-holl, kanmeulit Eñ, broadoù tud.

1. Rak meur eo E drugarez ouzhimp, ha gwirionez an Arloz a vez da viken.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen C'hlan.

Bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Amañ e teraou engwerzadoù ar meureizhgleuriad ; a-hend-all e kaner an heñveleion-mañ :

*Engwerzad 1 :*

E 'z taioni veur, Arloz, e 'c'h eus krouet pep tra dre da Gomz ha da Awen ; ur boud poellek 'c'h eus graet ganin da glodveuriñ da Anv santel, â Hollc'halloudeg ; dibaouez avat e 'z tismegan ; e 'z trugarez, ma dishual.

Digant da Gomz e c'hortoz ma ene, \* goubeizh a ra ma ene ouzh an Arloz.

*Engwerzad 2 :*

Bez koun, ene truezek, eus da vonez doueel hag eus da vro drafadel ; difrae d'o adkavout dre c'hreadoù dereat ; na stag ket ouzh an tremeniat : en neñv emañ da berzh ha douar luduet eo da gorf ; arabat d'al leiañ souriñ war an dreistelañ.

A-dal ged ar beure bet an noz, \* a-dal ar beure e c'houbeizh Israel ouzh an Arloz.

*Engwerzad 3 :*

Ene truezek, kae en arbenn d'an Hollvat gant daeroù gredus, anzav da bec'hedoù kent ar varn ; kaezhik, goulenn truez ar C'hrouer hag E drugarez ken na vo serr an nor,

Rak ouzh an Arloz emañ an drugarez, + gantañ emañ puilh ar frealz, \* Eñ a zaspren Israel eus e holl nammoù.

Amañ e teraou engwerzadoù ar vizreizh ; anez, e c'heller kanañ an engwerzadoù heñvelek d'ar Sent.



*Engwerzad 1 ar Sant.*

Meulit an Arloz, kenelioù-holl, \* kanmeulit-Eñ, broadoù tud.

*Engwerzad 2 ar Sant.*

Rak meur eo E drugarez ouzhimp, \* ha gwirionez an Arloz a vez da viken.

*Engwerzad 3 ar Sant.*

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen C'hlan.

*Klodvez ar Sant.*

Bremañ ha dalbezh, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Douevredwerz ar Sant (pe eus ar gleur pe an heñveleg).

*Douevredwerz heñvelek (gleur 4) :*

Benniget out, emezon, Hollc'hlan, pa dennez an dud eus islonk ar si hag an dic'hoanag ; dit e kanaan ar meulvan, Pried da Zoue, gwenvidik da viken, hag e veurganan, Hollvrieg, da zougadur kevrinleun, rak ganet 'c'h eus ar Salver d'ar bed hag e tishualez an denelezh, â Werc'hez, eus ar mallozh a-gozh.

**Ar c'hor**

**Meulgan ar Gouloù**

A C'houlouù lirazhin, eus Klod gwenn an Tad neñvel, nuñv ha glan, â Yezu Krist ; pand omp e pred ar c'huzh-heol, arvestomp gouloù an noz ha gourc'hanomp Doue, Tad, Mab hag Awen

C'hlan, rak mand eo azas bep kentel meulvan hon mouezhioù santel, da Vab Doue, Roour Buhez : gant se emañ dit klodveuriad ar bed.

*Lenn a ra al lennour (diouzh giz Hellaz) pe an diagon (diouzh ar c'hiz slavat) an urzhkan hag e werzadoù lerc'h ouzh lerc'h, ha diskanañ a ra ar c'hor an urzhkan bep tro. Diwar-henn ez adlenn al lennour pe an diagon an urzhkan betek e greiz hag ar c'hor ha kanañ an eil hanterenn anezhañ.*

## Urzhkan

### Da sadorn noz - gleur 6

Emañ an Arloz en E ren, \* gant sked ez eo gwisket.

k/ Gwisket eo gant galloud, ha gourizet gantañ.

k/ Ar bed en deus diazezet, didrantell e vezo, SI 92,1

k/ Da 'z ti e tere e santelezh, Arloz, a-hed an deizioù. SI. 92,5b

### Da sul noz - gleur 8

Meulit, an Arloz, \* koskor an Arloz ! SI 133,1a

k/ O vezañ e Ti an Arloz, e porzhioù Ti hon Doue, SI 133,1b

### Da lun noz - gleur 4

An Arloz a 'm selaouo \* pa c'harmin outañ. SI 4,4

k/ Pa 'm eus ouzhit galvet, Doue kevion, e 'c'h eus ma selaouet. SI 4,2

### Da veurzh noz - gleur 1

Gwennved ha trugarez ganin : \* e-tro deizioù ma buhez. SI 22,6

k/ An Arloz zo ma bugul : dienez din ne vo ket. War leton glas e 'm c'has da baouez. SI 22,1-2

### **Da verc'her noz - gleur 5**

A Zoue, salv ni dre 'z Anv \* ha dre 'z kalloud ma barn. SI 53,3

k/ Doue, selaou ouzh ma fedenn, ro steud da gomzoù ma  
genoù. SI 53,4

### **Da yaou noz - gleur 6**

Emañ ma aenez en Anv an Arloz, \* Oberour an neñv hag an  
douar. SI 120,2

k/ Ouzh ar menezioù e terc'han ma selloù. Peban e teuy din  
ma aenez ? SI 120,1

### **Da wener noz - gleur 7**

Ma Doue, ma gwardour out-Te \* gant da drugarez dirazon.  
SI 58,10b-11a

k/ Ma Doue, sav diwarnon ma erevent. ha ma diwall diouzh ar  
re a sav ouzhin. SI 58,2

## **Pedenn veur**

Teurvez, Arloz, hon diwall a bep pec'hed en noz-mañ. Benniget  
out, Arloz, Doue hon zadoù, ha benniget ha klodveuret ez eo da  
Anv dalbezh. Amen.

Bezet da drugarez warnomp, Arloz, pa c'houbeizhomp ouzhit.  
Benniget out, Arloz, kelenn din da gemenoù. Benniget out,  
Aotrou, desk din da gemenoù. Benniget, out, Sant, gwelev-me  
gant da gemenoù.

Arloz, dalbezh emañ da drugarez, na zismeg ket oberenn da zaouarn. Rak dit emañ ar meulvan, al lae hag ar c'hlod, Tad, Mab hag Awen. Bremañ ha dalbezh, a holl viskoazh da virviken. Amen.

### ar c'hor

**Amen.**

*Ha, diouzh an dro, an erieulad, lidet en naouaz, ken e kentgouelioù zo. Da heul an erieulad e tizro ar gloer en nev e skeud kan engwerzadoù an diouwerzad.*

#### *Diouwerzadoù ar sadorn noz*

- k/ Emañ an Arloz en E ren, \* gant sked ez eo gwisket. SI 92,1a  
k/ Ar bed en deus diazezet, didrantell e vezo, SI 92,1  
k/ Da 'z ti e tere e santelezh, Arloz, a-hed an deizioù. SI. 92,5b

#### *Diouwerzadoù heñvelek (ar sul da noz, gleur 1, salm 122) :*

##### *Engwerzad 1 :*

A Salver, divent ez eo mor ma nammoù ouzh ma beuziñ gant pouez ma gwalloù ; astenn din da zorn, â Zoue, evel ma rejout ouzh Per, ha bez trugarez ouzhin.

Ouzhit-Te 'm eus derc'het ma sell, Annezer an neñvoù. Par da selloù ar vevelion war daouarn o mistri, par da selloù ar vatezh war dorn he mestrez, emañ hon sell ouzh an Arloz hon Doue, ken na vo trugarez ouzhimp.

##### *Engwerzad 2 :*

A Salver, barnet on gant ma greadoù ha ma c'homzoù siek ; ro din c'hoant an azreg, â Zoue, ma c'harmin : salv-me, Madoberour, ha bez trugarez ouzhin.

Bez trugarez ouzhimp, Arloz, ouzhimp bez trugarez, pa'z eo barr betek re dimp an dismeg, pa 'z eo barr betek re hon ene, gant an dud valc'h o c'hoarzhin yud, gant dismeg ar re lorc'hek.

*Engwerzad 3 :*

Dre erieul an holl Sent ha Mamm Doue, ro dimp da Beoc'h, Arloz, ha bez trugarez ouzhimp, pa 'z out ar Mat nemetañ.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen c'hlan, bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

**Douevredwerz**

Levenez an urzhaz neñvel, gred galloudek ez out d'an denion war ar bed ; salv ni, Gwerc'hez hollc'hlan, rak, war-lerc'h Doue, ez eo ouzhit e c'houbeizhomp.

*Nunc dimittis* (Kanenn Simeon, Lk 2, 29-32)

Bremañ, Arloz, lez da waz da vont hervez da gomz en e beoc'h, p'o deus gwelet ma daoulagad da silvidigezh, aozet ganit dirak an holl dud, Gouloù da vout diskuilh d'ar broadoù ha klod da 'z poblad, Israel.

Santel Doue, Santel kadarn, Santel diankou, bez trugarez ouzhimp (*teir gwech*).

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen c'hlan, bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Trinded holl santel, bez trugarez ouzhimp ; Arloz, distaol hon fec'hedoù ; Aotrou, diskarez hon gwalloù ; Santel, deus ouzhimp ha yac'haat hon nammoù dre berzh da Anv.

Kyrie eleison. Kyrie eleison. Kyrie eleison.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'an Awen c'hlan, bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken. Amen.

Hon Tad a zo en neñvoù, hael ouzhit bezet graet, deuet dimp da Rouantelezh, bezet da Vennantez ken en neñv ken er bed. Bara an arc'hoazh, ro eñ dimp feteiz, distaol dimp hon dleoù pan omp o tisteurel da neb zo dleour dimp ; ha n'hon lez ket da vont tre en arnod, hogen sav diwarnomp an aerovant. Amen.

**Kimiadwerz (trogan) ar sant.  
Douevredwerz (ar sant pe heñveleg ar gleur).**

Dre bedennoù hon zadoù santel, Arloz Yezu Krist hon Doue, bez trugarez ouzhimp.